

Alan an Diuzet : 1900 (Ar Roh-Derrien) 1991 (Sant-Brieg).
Mestr-skol laik e oa.

Eur pehed er baradoz

An danevell-mañ a zo bet kontet din gand ma moereb Tintin Mon, kar d'am mamm.

Ma zad, euz Penn-ar-Bed, a oa deut er barrez evel sekretour meur en ti-kêr. Eno e kavas ma mamm hag e oent buan dimezet. Ma mamm a oa bet savet gand c'hoar he mamm, Tintin Mon ; houmañ a oa deut da veva gante.

Ma zad e-noa savet eun ti nepell diouz ar bourk en eul leh ma tremene gwechall an hent-houarn bihan. Ar plah koz ne ouie tamm galleg ebed. Med war ar brezoneg e oa kreñv meurbed. Heh armel a oa leun a leoriou koz : Buhez ar Zent, Ar Pevar Mab Hemon, An Aviel ha kalz re all. Anavezet he-doa Marharid Fulup e Pluned ha konterezed all. Hi ivez a ouie distaga ar yez en eun doare flour. Plijadur am-boa ouz he selaou, a-wechou e korn an oaled pe ouz taol. Ar mestr-skol a oa krog da rei dim kenteliou brezoneg hag, evel just, ne oen ket pell o treha war ma heneiled, a-drugarez da Dintin Mon. Euz prenester ma hambr e welen war-du ar hornog, war eur grehenn vihan en tu all d'eur riolenn, eur menaj koant, gwez en-dro dezañ a-dakadou bihan, brao-kenañ.

Dour ar ruzelenn-ze a ziskenne gorreg ha laouen war-du ar mor a veze gwelet, damwelet kentoh, du-hont war linenn an dremmwel.

Plijadur am-boa, eta, o selled ouz an dud hag al loened a veve eno : ar vamm, foulet dalhmad, an tad en-dro d'al loened, eur plah yaouank, ar verh hena, moarvad, sioul ha prederiet ; bugaligou en-dro dezi o c'hoari gand ar chas, unan bihan hag eur pikol hini all.

Seblantoud a ree an dud-se beza eüruz war o zachennig douar etre ar mor hag ar bourk. D'am daouzeg vloaz, tremenet mad ma arnodenn skol, ar zantifikad, e oen kaset en eur skol uhellog, e Plouared, evid kaoud ma breved. Gounezet ganin an testeni euz ma labouriou nevez, e fellas din mond da Roazon da heuliañ kenteliou ar Skol-Veur war dachenn ar brezoneg. Kavet em-boa e bureo eun noter euz ar vro eur garg a zekretour hag ar yez-se a vefe evidon, hag ar garg, eur zikour braz. E-pad bloaveziou, eta, e chomis pell diouz ma bro henidig hag an darvoudou a dremene eno.

Gwech an amzer eh anavezen tra-mañ-tra diwar gaoziou ma zintin Mon ; ma spered a veze e leh all. An amzer a dremenas evel-se, sioul, eüruz...

Hag eur bloavez e teuas ma zro da vond war ma leve. Distrei a ris e ti ma herent e leh ma ris anaouedegez gand tud nevez. Ma zad ha ma mamm a anaveze mad ar barrezianiz hag a weladenne meur a hini a bede aneze en askont da vadelez ma zad pa oa sekretour an ti-kêr. A-wechou ez ee ma gwreg gante ; gouzoud a ree komz brezoneg, eur yez eun tammig disheñvel ouz on hini. Med plijadur he-doa deski geriou nevez. Aliez, pa n'een ket da besketa, e chomen er gêr gand Tintin Mon da zelaou he hontadennoù a skriven goude evid eur gelaouenn vrezoneg.

Eun devez, e toull ma frenest, e sellen, evel gwechall, war-du ar hornog hag e welis ar menaj a zedenne ahanon. Med netra ken, na tud, na loened, sioul dre-oll ; hag e houlennis digand Tintin Mon ar perag euz an dra-ze. An hini goz, a oa damgousket en he hador-vreh, a zaillas evel eun tenn, eun doare spont en he daoulagad : « Paour-kêz paotr !, emezi, pa vi er bourk, arabad dit komz euz ar menaj-ze ; den ne respontfe dit ; ankoueet eo pell a zo. Evid ober plijadur dit e kontin istor mantruz an dud a veve eno. Setu !...»

D'ar poent-se e oe skoet war an nor ha torret ar gomz. Eun amezegez a oa deut da zegas eun toullad krampouez d'an dintin. Ne chomas ket pell, hag e oe kendalhet. « Pa oan yaouank, e veven nepell alese hag e vezen kaset di da gerhed lêz, amann, uou, eur hog pe eul lapin bennag. Hag evel-se e ris anaouedegez gand an dud hag o doare-beva. Ar plah yaouank, Mari, a oa damheñvel deuz ma oad ; he breur a oa eun tammig kosoh ; hag e krogas darempredou kenetrezom, en on lojeiz, er skol, er hatekiz, er goueliou...

Kreski a rejom, hag eur zulvez, gortozet ganin pell amzer e-kichenn ar piñsin dour benniget, e oe red din antren en iliz ; Mari ne oa ket deut d'an overenn ar zul-ze. Petra a oa bet c'hoarvezet ? Gouzoud a reen e oa stard al labour en ti abaoe maro ar vamm, eur bloavez kentoh. Goude kreisteiz ne gredis ket mond da houlenn kelou hag e oe red din gortoz beteg ar yaou evid kleved e oa klañv Mari gand eun derzienn boaniuz. Ne ree nemed disteurel beb an amzer. Ar medisin ne lavare netra resiz. Med eur yaouvez, deiz marhad ar barrez, e oe klevet ar wirionez : Mari a oa brazez da driweh vloaz. Ar helou a redas buan er bourk ha war ar mêz. Med piou a oa an tad ? Unan, moarvad, euz ar wazed a zaremprede an ti. Ne anavezad nemed paotr al liziri, an devezour, eur pesketaer a chome da eva eur volennad jistr war-lerh e droiad, hag an tad. An devezour a oa eur paotr yaouank war-dro ugent vloaz, sioul, poanier, kreñv, karet gand an oll.

A-hend-all, ne veze soñjet e den ebed. Evel just an teodou fall a yee war-raog a-zivoud an den-ze. A-benn ar fin e teuas ar haoziou beteg e ziskouarn ; hag eñ, ken sioul koulskoude, a gounnaras beteg kuitaad ar menaj war an taol.

Neuze, avad, e tistagas muioh c'hoaz an teodou fall. Ar paour-kêz paotr n'hellas ken kavoud labour er vro, hag e kuitaas ar barrez.

An teodou a davas neuze hag ar peoh a renas adarre e-touez an dud ha, dreist-oll, er menaj. Mari a zeblante adveva med, memestra, e chome prederiet ha ne gomze ket d'an oll. Da genta e oan chomet eur pennadig heb mond d'ar menaj ; eun devez, eh adkrogis gand ma hefrediou, lêz hag all, hag evel m'am-boa greet plijadur da Vari, e kendalhis da vond di bep sadorn. Ne glevis netra eno diwar-benn an darvoud. C'hoari a reen gand ar verhig nevez ganet a oa bet anvet Janig. Med Mari ne ree fed ebed ; ne welen ket aliez an tad a chome dalhmad en-dro d'e loened. An eürusted he-doa kuiteet an ti ha Mari a ouele beb an amzer. He bugel ne oa netra eviti.

Eun devez, gwreg ar gward-mêziou, Mari-Job, a oe karget gand he gwaz da gas eul lizer malluz d'eur martolod war e leve nepell diouz menaj Mari. O tistrei d'ar gêr, e kemeras eun hentig a dremene stok ouz an ti-anez. A-greiz-oll e klevas blejadennou eur bugelig. Goustadig e tostaas hag a-benn ar fin, e hellas kleved tabut etre diou vouez. An den ne lavare ket kalz a dra, med ar plah a zave he mouez muioh-mui, hag a gunujenne a-bouez-penn : « Ya, ma zad, echu eo bremañ kenetrezom ; ne gouskin ken ganit ; re a zroug e-teus greet din, kollet on-eus eun devezour dreist ha bremañ ez eo red din labourad evel eul loen ; tra-walh evel-se ; mond a rin kuit hag e skoin ar bugel daonet-se e dour ar riñvier ! - « Serr da henou, diodez, ma vefes klevet ! Ne ran forz ebed ; da verh a zo c'hwez an diaoul ganti... » Mari-Job ne glevas ket muioh ha, sioul, a guitaas o tremen dre a-dreñv eur hleuz heb beza gwelet.

Komprenet he-doa. Eun istor mantruz e gwirionez, da chom dianav d'an oll. Med kit da herzel ouz eur plah da zerri he genou, eun teod beo flamm e-barz ? Penaoz e redas ar helou ? Gand piou ? Eun dra a zo gwir ; a-raog diwez ar miz ne gleved er barrez nemed kaoz an darvoud-se. An dud a oa evel spontet.

Evel just e oa diêz din distrei da di Mari. Med diêsoh c'hoaz tremen heb he gweled en he foan spered. Hag eun abardaez eta, setu-me adarre d'ar menaj, abaf eun tammig, aonig kentoh ; penaoz e vefen resevet ? War doull an nor e klevis Janig vihan o klemm evel boaz ; Mari, en-dro d'he amann, a chomas souezet ouz ma gweled, med laouen war eun dro : « Peleh e oas chomet ? emezi ; n'ouzon ket petra a zo bet c'hoarvezet ; med ne welan den ebed ken ! » Chom a ris dirazi heb mouez ha trumm en em lakaas da ouela : « Maleüruz on, Monig ; ha n'ouzon ken petra ober euz ma buhez ! » « Da genta oll, Mari, soursial ouz da verh ! » « Ne blij ket din ! », a respontas. Neuze e kemeris ar bugel em divreh hag e lakais ar plahig da vousec'hoarzin. « Na koant eo, sell, Mari, eur blijadur eo oh ober en-dro d'eur grouadurez evelti ! » Sklerijenni a reas eur pennadig dremm ar vamm ; med kerkent e varvas al luhedenn-ze.

Tostaad a reas ouzin : « Selaou, Monig ; eun devez e kontin dit orin ma foaniou ; bremañ n'eo ket posubl. Deus da weled ahanon evelkent ; kement-se a vo gounezet war an digenvez brevuz en-dro din.» Kemer a ris ma hefrediou, lêz hag all, ha me en-dro d'ar gêr, sioulleet eun nebeud ma halon, med nehet memestra.

War-lerh ma gweladenn e seblante Mari ober muioh a fed ouz he bugel a greske evel ar vugale all. An tad ne veze gwelet morse ; chom a ree en e wele beb an amzer hag eun devez e kouezas klañv da vad. N'hellas ket Mari tremen heb ober en-dro dezañ. Med ar paotr-koz ne bareas ket. Treutaad a ree ha tristaad muioh-mui ; ne lavare grig da zen hag, eun devez, en em lakeas da ouela, hep paouez, o selled a beb eil ouz e vugale ; felloud a reas dezañ c'hoari gand an hini vihan, Janig, med ar vamm a gasas anezi er-mêz. An deiz war-lerh e oe kavet maro en e wele.

Mari en em zantas dizammet ; med bremañ e chome heh-unan er menaj, braz a-walh eviti, gand eur bugel na blije ket dezi.

Evel just, e houlennas diganin mond di aliesoh ha neuze eh anavezis dre ar munud buhez reuzeudig ar paour-kêz plah. Med, koulskoude, ne gomprenen ket perag e chome ken kaled gand he merhig a oa eur bugelig koant kenañ ha c'hoarzuz ganin. Nann ! netra d'ober. Ma! kreski a reas memestra ha, tamm-ha-tamm, e tostaas adarre an dud ouz an ti.

Hag an amzer a dremenas beteg ma oe tost ankounac'haet ar vrud fall-ze. Mari he-deveze dalhmad plijadur o resev ahanon ; mignonezed mad e oam.

Distro Yann

Eur yaouvez, devez marhad ar barrez, e teuas en ti-kêr daou aotrou d'ober eun enklask diwar-benn doare ar patatez er vro.

En ti-debri ma oant o verenna, e oe anavezet unan aneze gand Job, ar higer : « Demad, Yann, eme hemañ, petra a rez dre amañ ? Ha peleh ez out ? Kemer eur bannah ganin ! » Hag int o-daou d'ar hontouer gand an aotrou all. Konta a reas Yann e vuhez abaoe m'enoa kuiteet ar barrez. An den a oa gantañ a oa eur marhadour braz war binvidigeziou an douar : patatez, ed, legumaj, maiz hag all. Felloud a ree dezañ prena patatez euz eur ouenn nevez. Red e oa dezañ tremen dre eun toullad menajou : « Kompren a ran, eme ar higer, hag ho-peus kavet Yann da vlenia ahanoh ? Evel-se ez ay an traou buannoh. Gwir eo, anavezoud a ra ar beizanted ! »

Tremen a rejont eun toullad deveziou en otel war-lerh o labour pemdezieg. Eun devez e tegouezjont e ti Mari, a oa o lakaad ar houëz da zeha.

Pa oent tost a-walh, e lezas Mari eul liñsel da goueza war an douar. Yann a redas evid he dastum hag he stegna war ar gordenn.

Sebezet, an aotrou en em houlenne ar pezh a dremene. Kompren a reas pa welas Yann o starda dorn Mari ha lakaad eur pok war he zal : « Ahanta, Mari, gweled a rez, an den abaf a oa ahanon gwechall a zo kemmet da vad ; kredet am-eus rei eur pok dit ; gwechall e oan eur bugel hepken. » Janig vihan a oa deut da hoari en o hichenn : « Moarvad ez out dimezet bremañ, Mari ? » - « Siwaz ! nann », emezi. » Luha a reas daoulagad Yann. - « Neuze n'eus den ebed ganit ! » - « Nann ! » - « Hag an tad ? » - « Maro eo pell 'zo a-drugarez Doue ! » - « Kompren a ran, Mari. Gouzoud a reen ar pezh a dremene er menaj. Ar gwella evidon a oa mond kuit. Hag e souezan oh en em gavoud amañ ganit ; petra a dalvez an dra-ze ? N'eus nemed eun diskoulm d'ar gudenn. Plijoud a rez din en despet d'an darvoud fall, ha muioh c'hoaz marteze ; rag poan a ra din ouz da weled gwalleüruz. A-raog mond kuit e teuin da lavared kenavo dit. » - « Med antreit bremañ d'eva eur volennad jistr ! », eme Vari. Hag int en ti e-leh ma tebrjont ivez eun tamm kig-sall. An aotrou n'en-doa ket komprenet ervad ar gaozeadenn ; Yann a sklerijennas e spered hag a lavaras : « Mond a rin kuit warhoaz. Digarezit ahanon ! » Med ne gomprenas ket muioh.

A-raog kuitaad, e teuas Yann da di Mari, seder evel eur paotr youank : « Selaou, Mari, emezañ, biskoaz n'em-boa kredet digeri dit ma halon ; ma harantez evidout a zo chomet evel gwechall. Ma fell dit e timezin ganit !» Ar geriou-ze a lakaas an tan e korv ar plah a zaillas gand Yann evid pokad dezañ.

Divizet e oe ober an eured ar buanna posubl.

- « Hag ar bugel ? », a houlennas Yann, « n'eo ket dim ». -« Kement-se n'eo netra « !, emezi ; lakeet e vo e ti ar seurezed !» Fulori a reas Yann : « Biken !, emezañ. Dit-te eo ha din e vo !» Plega a reas Mari he fenn ha mouza eun disterra. Med kerkent en em lakaas da vousec'hoarzin.

Kuitaad a reas ar vro an daou veajour; med red e oe da Yann diskleria, dre ar munud, d'e aotrou, e vuhez tremenet. «Gra euz da wella, ma faotr. Pouezuz eo an dra-ze. Chañs vad dit !»

Yann er vro

Teir zizun bennag war-lerh an emgleo-ze e tistroas Yann da di Mari.

Pep tra a oa bet aozet euz ar henta evid e resev. Eva a reas eur volennad jistr hag eur werennad kafe hag, o pokad d'ar plah, e lavaras : « D'al labour bremañ! C'hoant am-eus d'ober euz ar menaj-mañ unan euz re wella ar vro!» Hag e oe komzet euz al labouriou niveruz a vez kavet war ar mêz. « Ankouaet em-eus meur a hini, Mari; med ne vin ket pell o tond a-benn euz ar gudenn-ze; ganit em-eus adkavet an nerz da veva en eun doare dreist!» Mari he-doa poan o kredi e oa deut eviti eun amzer a eürusted; ha, koulskoude, an dra-ze a vefe bet gwir; med pa welas Janig vihan o c'hoari gand Yann hag o pokad dezañ e tristaas en eun taol. « Petra a zo, Mari, klañv out?» Ne respontas ket hag ez eas da azeza ouz taol e leh Yann a zervijas dezi eur bannah kafe.

Hag e krogas eur vuhez nevez evite o-daou.

Ar helou euz an darvoud-se en em skignas buan er bourk hag er barrez a-bez. Janig a oa bremañ eur bugel evel ar re all : kerent dezi, ar pezh a zo talvouduz. An eured a oe lidet buan- ha-buan; kalz a dud a oe en-dro d'an ti-kêr.

Monig a oe pedet d'ar verenn en ti-debri. Evel just ne oe ket pell Mari o kaoud bugale. Da genta, eur paotrig; Yann a gavas eun ano evitañ : Ernest. « Biken!, eme Vari, ano an diaoul, hini ma zad. Biken! Lakaom kentoh Yann evelout! — Neu- ze, eta, gwelloc'h eo Yannig!» Evel-se e oe greet.

Dond a reas Monig da weladenni ar bugel hag e kendal- has da zond bep sadorn d'ober he hefrediou. Eun tamm joaüs- ted a rene e kalon Mari daoust ma ne blije ket dezi ar garantez etre Yann ha Janig. Houmañ a zeblante adveva eur vuhez nevez ha Yann a oa laouen o weled ar plahig o soursial ouz he breur bihan.

Daou vugel all a oe ganet er menaj : eur plah hag eur paotr. Ha Janig a dostaas ouz he femzeg vloaz. Sikour a ree he mamm euz he gwella; med kement-se ne harze ket ouz Mari da grozal dezi evid traouigou dister. Kaer e-noa Yann kente- lia anezi, netra d'ober. Eun devez e seblantas dezañ kompren doare e wreg; distro d'ar porz, e sikouras diskarga an dumpo- rell ha bernia al legumaj en ti-karr.

Mari a oa war doull dor an ti o selled. Echu al labour, e oe ken laouen an daou vicherour ma'z ejont war-du Mari ha heja o divreh gand ar joa en eur ober eun dro-valz. Kement-se ne blijas ket da Vari. Kerkent e huchas, a-bouez-penn : « Janig, erru eo poent goro ar zaout!» Ne oe ket pell ar plahig o vond da graou ar zaout ha da leunia ar helorniou. Yann a chomas souezet o weled e wreg o tistrei d'an ti heb ger ebed ken.

Adaleg an deiz-se e chomas Janig en ti-annez, ha Mari a zikouras Yann el labouriou all, er porz koulz hag er parkeier.

Gwir eo, Janig a oa deut da veza eur plah yaouank kreñv, turniet mad ha plijuz. Da hwezeg vloaz e laboure er menaj evel eur plah wirion. Sevel a ree bugale he mamm a oa

eüruz a-drugarez dezi; e peb leh e sevene eul labour dreist; med Mari a zeblante dezi e vanke eun dra bennag; kaer e-noa Yann ober he meuleudiou.

Eun devez e lavaras Mari d'he gwaz : « Yann, deut eo mad an traou ganim; on bugale-ni, n'eus trubuill ebed gante. Prestig n'on-bo ket ezomm euz Janig en-dro deze. Hag e hello beva eviti heh-unan. Pa vo triweh vloaz, hervez al lezenn, e vo mestrez warni heh-unan, hag e hello gounid he buhez!»

Chom a reas Yann evel seizet; ma n'hellas lavared ger ebed. Hag e-pad eun toullad deveziou ne oe ket kaoz euz ar gudenn-ze. Med Mari a gendalhas d'ober he seiz gwella evid lakaad Janig pell diouz Yann.

« N'eo ken eur bugel, Yann, ha n'eo ket dit. N'e-teus netra d'ober ganti!» Feuket e oe Yann da vad hag e yeas d'ar park heb eur ger. Bremañ e-noa komprenet. Mari a oa gwariziuz ouz he merh. Ha, moarvad, e teue dezi da zoñj euz an darvoud c'hoarvezet ganti heh-unan.

Kaer e-noa Yann beza karantezuz e-keñver e famill a-bez, e chomas en ti eur vrumenn deo a dristidigez. « Yann, a lava- ras eun devez Mari, red e vo diskoulma ar gudenn ampoezonet- se pa vo Janig triweh vloaz. N'eus netra all!» Ha Yann, heb eur ger, d'ar marchosi da voueta e varh.

*

**

Tintin Mon hag he niz a gendalhe gand o hontadenn pa en em gavent o-unan en ti. « Mond a reen bepred, emezi, d'ar feurm da gerhad amann ar zizun, hag e chomen da hoari gand ar vugale e-keit ha ma veze Mari gand he labouriou er park pe el liorz, pe er hrevier. Janig, eta, a zoursie ouz an ti hag ar vugale hepken; hag evel-se e hellas diskleria din ar hemmou degouzet er menaj abaoe nebeud amzer. Ne gomprenen ket Mari gand he c'hoant d'en em dizober ouz he merh, ken sioul, ken hegarad e-keñver he c'hoar hag he breudeur kresket mad bremañ ha seven meurbed.

Beb gwech ma kave Mari war he hent eh êsae kentelia anezi. Poan gollet; aheurtet e oa, dreist-oll pa wele aliez ar vugale o tostaad muioh-mui outi, hag he gwaz, Yann, o floura bleo Janig hag o pokad dezi. Tostaad a ree buan an deiz ma tegouezfe triweh vloaz ar plah yaouank.

Penaos en em skign ar heleier? N'ouzer ket a-wechou; med eun dra a oa gwir, kelou euz disparti Janig a rede dre-oll. Hag eur mintinvez en em gavas er vereuri eur plah yaouank-koz a-berz ar varkizez da houlen Janig evel matez. Neuze, avad, e fuloras Yann. « Eur véz eo evidout, Mari, lakaad da verh dindan dreid ar re all pa'z eus amañ peadra da veva an oll famill en eun doare deread. Me, bremañ, a zoursio outi, ha ne weli ken anezi war da hent!»

Yann e-noa eur breur e Pariz; implijet en treñ dindan-douar. Skriva a reas dezañ ha diskleriet pep tra resiz-mad, e hou- lennas digantañ klask eur plas mad evid Mari.

Eun toullad deveziou goude, e resevas ar respont. Gwreg medisin e vreur a felle dezi kaoud evel matez eur Vretonez. An afer a oe ingalet buan ha devez an disparti ne oe ket pell o tostaad. Yann e-noa pedet e vreur da zond, eñ e-unan, da ger- hed ar plah yaouank. Tremenn a reas an nozvez en otel hag an deiz war-lerh e kavas Janig er porz gand he malizennou prest abaoe goulou-deiz, gand ar vugale en-dro dezi o ouela evel o hoar, kaer he-doa bet o mamm herzel aneze.

Pa zegouezas gwetur e vreur e oe karget pep tra gand Yann; oll e pokjont da Janig, an daerou o ruillal war o dioujod; hag e lohas ar wetur war hent Pariz. Ne vefe nemed eur vunutenn ne oe ket bet gwelet Mari a oa chomet en he hambr. Yann a chomas eur zizun leun heb kaozeal ganti.

Janig e Pariz

Ar medisin ne chome ket pell diouz ti breur Yann; war an oad e oa dija hag e wreg ne zeblante ket kaoud eur yehed gwall greñv. Janig a oe eur joa evite.

Ha houmañ en em gavas en eun taol e-touez tud seven, hegarad ha brokuz zoken. Rag an Itron a baeas d'he matez eur vroz nevez hag eun davanañjer a-zoare.

Janig a ree euz he gwella evid plijoud d'ar vestrez ha d'an Aotrou na lavare morse eur ger a-dreuz pa ree eur zotoni vihan bennag en e vureo. « Kustumi a reot tamm-ha-tamm! » a lava-re; hag e c'hoarze.

Hag an amzer a dremenas evel-se. Janig a gouske mad war-lerh he devez karget a-walh a-wechou. En he gwele e tegoueze dezi soñjal en he yaouankiz; he c'hoar hag he breudeur a vanke dezi, memestra hag he-deve evel truez ouz he mamm. Perag, eta, e oa bet ken yen en he heñver?

Bep sul ez ee ar medisin da vale gand e wreg e ti mignoned hag e lezent Janig d'ober ar pezh a felle dezi. Evel just kement-se a blijas d'ar plah yaouank a yee da weladenni Jul, breur he zad-kaer, a veve nepell alese. Hag evel-se e hellas Janig anavezad, bihan-ha-bihan, ar gêr vraz ha tud nevez, mignoned da Jul. Yann a skrive da Janig bep sizun, med dre guz, en ostaleri Filo, er bourk. Ha Jul, breur Yann, en em garge da respont d'e hoargaer en eun doare kevrinuz eviti. Janig en em gave eüruz a-benn eun toulladig sizuniou

hag e reas anaoude-gez gand keneiled Jul. Mond a reent d'ar goueliou tro-war-dro, d'ar sinema, d'ar baliou. Siwaz! red e oe dezi chom aliesoh e ti ar medisin rag an Itron a oa kouezet klañv. Ober a reas en-dro dezi evel pa vefe bet he mamm ha pa bareas e oe ken laouen an daou goz ma oe lavaret d'an hini vihan : « Janig, mond a reom evid daou viz da ziskuiza e broiou ar Hreisteiz; ma fell deoh, deuit ganim pe, neuze, kemerit daou viz koñje.» Jul, a oe goulennet e ali, a ginnigas da Janig chom gand e wreg. Hag evel-se e oe greet. Int, ivez, o-doa divizet tremen an hañv e diavêz Pariz. « Mond a rin eun toullad deveziou e ti ma breur!, eme Janig dioustu, eur sklerijenn en he daoulagad. Med resevet e vin?» Ar wreg a oe ivez a-du d'ober eun taol-êsa.

Hag eun devez, e miz eost, setu-int war-du Breiz, gand ar wetur. Rene, bugel Jul, a oa azezet war varlenn Janig, a blije dezi ar vugale. Treuzet gante ar vro goz, o hini, Breiz, setu e tegouezjont e parrez Janig. Eun interamant a oa o tond e-mêz euz an iliz; kalon ar valeerien a yennaas war eun taol. Jul a houlennas piou a oa maro. « Eur hoz mezhvier », a oe respontet dezañ rust a-walh. Jul a fellas dezañ eva eur bannah jistr da genta oll. Evel just e oe e ti Filo. Houmañ a oe sebezet o weled Janig deut da veza eur plah kaer mistr, joaüz. Adverennet e oe gand krampouez, nevez hreet ha kafe euz an dibab.

Leun ar hovou, hag ar wetur war-du ar menaj. Jul a oa prederiet eun nebeud; penaoz e vefe resevet? Janig ne zoñje nemed en he c'hoar hag he daou vreur.

Pa oe ar wetur war-zav er porz, e teuas raktal ar vugale en-dro dezi o youhal gand ar joa.

Mari, a oa war doull an nor, a dostaas ivez. Pokad a reas d'he breur-kaer, d'e wreg ha d'ar bugel; med pa welas Janig e oe darbet dezi sempla : « Petra a rez amañ, te, merh an diaoul? Kaset em-eus ahanout er-mêz da viken, n'antrei ken en ti-mañ!» Hag e redas etrezeg ar gêr. Chom a reas Jul evel seizes. Biskoaz kemend-all! Ne vez ket dismegañset an dud en eun doare euzuz evel-se. Jul a oa nehet. Ha Yann muioh c'hoaz. Jul a lavaras : « Arabad dit chala, ma breur, mond a reom d'an otel fenoz. Warhoaz e teui da verenna ganim ha goude raim tro Vreiz.» Janig a roas eun toullad gwenneien d'ar vugale hag int d'ar bourk.

Tremen a rejont an nozvez en otel. Eno e weljont meur a vignon, souezet, evel just, ha laouen-tre. « Me, eme Tintin Mon, pa'm-boa klevet ar helou, a oa eet ivez. Janig a gontas din ar pezh a oa bet tremenet e porz ar menaj. Krozet em-boa da Vari ar zadorn war-lerh, med ne reas van ebed.»

Bale a reas ar famill e-pad eur zizunvez war aochou Breiz ha, distro da Bariz, e pokas Janig d'he mignoned nevez o trugarekaad a-greiz-kalon. Pedet e oe da chom en ti da hortoz distro he mistri diouz ar Hreisteiz. Hag ar vuhez a adkrogas evid Janig en eun doare plijuz. Memestra e chome en he halon eur boan na baouez ket; ne gompren ket he mamm; c'hoant he-defe bet da chom ganti eur pennad c'hoaz evid kemma he menoziou. Med kement-se a oa dihalluz rag aheurtet e oa; eviti, Janig a oa merh an diaoul.

Petra ober? Jul a dremenas heb mond beb bloaz da di e vreur; skriva a ree dezañ dond d'e weled en otel e leh ma tre-mene daou pe dri devez. Janig a blije dezi adweled he breudeur a zeue d'an otel o tegas gante c'hwez an ti n'helle ket ankouaad, daoust d'an darvoud fall. En eun taol e oe kemmet pep tra. E-pad eur bal, e reas anaoudegez gand eur heneil ya-ouank da Jul, a labourer en treñ dindan douar. Divizet e oe lida an eured e-pad an eost. Ar medisin, daoust dezañ beza trubuillet, a oa laouen evid Janig : « Dond a ri gwech an amzer d'an ti!», a lavaras ar wreg a baes dezi eur vroz vrao gand dantelez.

Adaleg neuze en em zantas Janig eur plah evel ar re all. He gwaz a houneze mad e vuhez; anavezoud a reent tud a bep seurt hag e valeent aliez, o-unan, pe gand strolladou disheñvel beb gwech. Janig a zeske evel-se traou nevez hag he spe-red a zioullae muioh-mui. Soñjal a ree nebeutoh en he mamm hag er vugale. O buhez a oa splann bremañ e-kichen Jul a roe deze kelou euz ar barrez heb menegi ar vamm digar.

Siwaz! eun devez e resevjont eul lizer a-berz Yann. Kemenn a ree e oa klañv Mari gand eur hleñved grevuz a-walh. Ne ouie ket c'hoaz dres ar medisin, ar pezh a oa.

Felloud a reas dioustu da Janig mond d'he gweled. « Nann! eme Jul, gortozom eur pennad c'hoaz. Ha neuze ne dalvezfe da netra; skoet e vefes er-mêz evel ar wech all.» Neuze en em lakeas e wreg da ouela : « Koulskoude n'on ket kirieg euz ar pezh a zo c'hoarvezet; na ma mamm kennebeud; truez am-eus outi. He gwaz ne gompren ket menoziou e wreg.

Ne oe ket tremenet ar zizun ma resevjont eul lizer all. En dro-mañ e oa sklêrroh; ar hleñved a oa dizoloet; ar hrign-beo a oa kresket en he genou. Da genta ne oa nemed eur gor; war he muzell izella; hemañ a zavas buan beteg kregi an teod en e veg. Neuze e oa deut ar boan da greski.

Ne zaleas ket Janig : « Red eo dim mond bremañ; ne vefe nemed evid Yann ma zad-kaer a zo bet ken karantezuz em heñver.» Jul n'helle ken naha. Hag e kemerjont eur wech c'hoaz hent Breiz.

Degouezet e ti Yann e kavjont eno Tintin Mon : «Ya, eme houmañ d'he niz, eet e oan da weled Mari rag truez am-boa outi.» Hag e kendalhas : « Souezet e oen pa zegouezas Janig; mond a ris ganti beteg gwele he mamm; houmañ a zellas outi heb he anavezoud; med tamm-ha-tamm e sklerijennas he spe- red; evel ne oa ket barreg da gomz, en em lakeas da grena, da heja en he gwele ha da dufa war-du he merh; sebedennet, spouronet zoken, oh en em zoucha e divreh he gwaz; hemañ a lavaras : "Eom er-mêz eur pennad".Janig a oa gwenn evel eul liñsel. Ha koulskoude, emezi, em-eus c'hoant d'ober eun dra bennag eviti.» Tintin Mon a grogas gand ar gomz : « Warhoaz, emezi, e lavarin deoh ar pezh am-eus ijinet evid dond a-benn euz he fenn-fall. Deuit e ti Filo e leh ma paein deoh eun dasennad kafe. Eno e vo aozet pep tra.»

An deiz war-lerh en em gavjont en ostaleri Filo, nemed Yann a oa chomet gand e wreg, skuiz-kenañ.

War-lerh ar hafe hag ar hrampouez, e krogas Tintin Mon : « Anavezoud a ran ervad ospital ar barrez gand e vedisin hag an teir glañvdiourez; goulenn a rin digand ar renerez gwiska Mari evelte hag e hello chom e-kichenn he mamm.»

Janig a spontas da genta. « Gwiska dillad eur seurez, n'eo ket deread! emezi. » C'hoarzin a rejont. « N'eus seurez ebed en afer-mañ!, a lavaras Tintin Mon; da vamm a vo enoret o weled eur glañvdiourez war he zro!»

An deiz war-lerh e treuzas Janig ar bourk en he haerra, lorh enni; daoust hag-eñ e teufe ar maout ganti? Kement-se a lakee he halon da dridal.

Erru er menaj, Tintin Mon a yeas rag-eeun d'ar gwele : «Se- tu amañ, Mari, eur plah a vicher war ar hleñvejou hag a raio kalz a vad dit.» Splannaad a reas dremm Mari hag e stardas dorn ar plah en eur vousec'hoarzin. Ken fromet e oa Janig ma fellas dezi simpla hag eh azezas war ribl ar gwele.

« Warhoaz, emezi, e teuio ar medisin hag e lavaro din penaoz en em gemer evid ho para.»

C'hoarzin a reas Mari en eur starda dorn ar plah a oa deut d'he savetei.

En noz-se e oe ingalet gwele Janig, e kambr ar vignoned; he gwaz a oa chomet en otel.

En deiz war-lerh, pa oe degouezet ar medisin, e tiskouezas da Janig an doare da nêtaad ar gouliou. Ar muzellou a oa goeñvet; an teod a oa ruz-tan hag ar boan he-doa kresket; n'helle ket Mari debri; red e veze ober eun doare zoubenn gand an oll vagaduriou; al louzou a oa niveruz ha roet e pep koulz an devez. Buan e kustumas Janig dond a-benn euz he micher nevez. Eul louzaouenn nevez a oa bet ijinet hag e oe greet eun taol-êsa war ar paour-kêz plah. Ahanta! tamm-ha-tamm e paouezas Mari da dermal hag eur beurevez e lavaras ar medi- sin : « Bremañ e hello debri ha dond er-mêz euz he gwele eur pennadig bemdez.» Ar joa a oa ken braz e kalon Vari ma pokas d'he merh gand karantez. Houmañ a ouelas doureg, kement e oa eüruz. Med trumm e sellas he mamm outi en eun doare iskiz;

Janig a grenas o soñjal e oa bet dizoloet; tremen a reas buan an enkreuz-se hag e kendalhas ar vuhez nevez, sioul ha diboan. Siwaz! ar hleñved-se a zo trubard; lazet en eul leh, e fell dezañ kregi en eul leh all. Ar pezh a hoarvezas diwar-goust an avu. Neuze, avad, ez eas an traou war-raog spontuz. Ar boan a greske muioh-mui; ne zebre ken Mari; blejal a ree ha goulenn ar maro! Janig a oa maleüruz o weled na helle ken netra eviti.

Hag eun abardaevez e varvas ar paour-kêz plah. Ne oe ket kalz a dud d'he interamant; re anavezet e oa en despet d'he foaniou.

Janig, diviet-krenn, a chomas en he gwele beteg ma oe diskuizet mad; med n'hellas ket adkavoud an nerz da zebri hag ar galon da veva evel diagent rag n'he-doa ket gallet savetei he mamm.

An amzer a dremenas hag ar yehed a yeas kuit ganti. Mervel a reas eur pennad goude, distro he gwaz euz Pariz.

En dro-mañ e oe gwelet a-viskoaz er barrez eur seurt interamant. Brud Janig hag he madelez a oa en em skignet dre-oll.

Ar person a reas eur brezegenn fromuz hag a echuas evel- henn : « Kristenien ger, ma breudeur ha ma hoarezed, n'an- kounait biken ar gentel a zo bet roet deoh gand ar plah-mañ; ganet er pehed, ne oa ket kirieg anezañ. Dismegañset, zoken gand he mamm, e roas he buhez evid ma vefe dizammet he spered ouz ar pehed-se. Janig a oa anezi eur wir zantez!»

Kerkent e oe klevet en iliz diou pe deir gador o koueza. E oa ar hure ha diou goz dimezell o vond kuit, feuket gand sarmon ar person. Lavared a rejont goude : « Eur véz eo keñve- ria buhez ar zent gand hini eur plah kollet heh enor.» Med ar person a gemeras e gure a-gostez dioustu : « Ma breur yaouank, bevit eur pennad c'hoaz hag ho menoziou a wellao; buhez an dud a zo kriz a-wechou; n'heller ket dalhmad herzel ouz an diêsteriou ha chom glan-krenn. Janig a oe ganet en eur pehed braz na oa ket kirieg anezañ; nag he mamm kennebeud; den ne hell barn eun den all; n'eus pehed marvel ebed etre an dud; ne vez kavet nemed en hini a baouez da bedi Doue!»

Prederiet don gand ar homzou-ze, e kuitaas ar beleg an iliz o lavared : « Trugarez deoh, aotrou Person!»